


STALIN HA SAVIDIGEZH AR STAD SOKIALOUR

Teul 1. Ur vro a beizanted e oa U.R.S.S, unan hag a oa suj d'ar broioù kapitalour, d'o c'hoantoù ha d'o fennadoù. Pal pennañ ar plañ pemp blez a oa ober anezhi ur vro industriel ha gellodus, unan hag a vehe bet mestr ar hec'h oberoù ha dijapl a veli ar gapitalouriezh etrevroadel. [...] An industriezh pounner hepken a c'helle adsevel ha lakaat ar sav an industriezh en he fezh, an trañsportoù hag ar labour-douar. [...] Sakrifisoù bras a vehe reket evit disoc'h get an pal-mañ, a lâre ar Strollad ; soñjet mat e oa da zisoc'h get ar pal-se en ur implij nerzhoù ar vro hepken, hep amprestiñ argant en diavaez.

Jozeb Stalin, *Doktrin an U.R.S.S.*

Teul 2. Kamaraded, skriv a rit en ho kazetenn eh a rac'h ar beizanted paour pe un tammig aezet a-barzh ar c'hkolkoz ag o fenn o-unan, met nend eo ket gwir. Da skwer, en hor parrez-ni, e Podbuzhir, an oll nend aont ket er c'hkolkoz ag o vat volonte. Ur roll a oa bet lakaet da dremen, evit an dud da lakaat o anv er c'hkolkoz : 25% hepken a sinas, ha 75% a chomas hep ober. Evit dastum an hadoùier, int o deus lakaet ar spont da ren, bountet o deus prosezoù get an dud, arrestet o deus-int. Pa zae unan bennak ha sevel enep dezhe, e veze kenniget prizon pe labourioù-palfors dezhe. Faziet hoc'h eus ar poent-mañ, Kamaraded : afochiñ a ray ar strolliñ-douaroù ma vez palforset ar beizanted da blegiñ dezhoñ ; ret eo mah asantint oll d'en degemer... Nand it ket ha diskuliñ ma anv, mar plij genoc'h, rak fach e vehe get tud ar Strollad...

(Sinet : Polzikov). Lizher kaset get ur peizant d'ar gazetenn *Hor c'humun*, tro ar blez 1930.



5/ Kehel Stalin

Stalin, uheloc'h ous evit an neñvoù uhelañ,
Ha ne fehe bout kavet netra uheloc'h evidous, nemet ta soñjoù.
Lugernusoc'h eo an heol evit ar loar hag ar stered,
Met ta spered, Stalin, a zo lugernusoc'h evit an heol !

Zozulia, Lakhouti, Tchatchikov,
Gwerzoù ha kanennoù a-ziâr Stalin, 1937.

Teul 4. Diskaret a zo c'hoazh un delwenn ag amzer Stalin : hervez ar *gKomsomolskaia Pravda*, kazetenn ar yaouankizoù komunour, Stakanov, ar minour ukrainian a oa daet e anv da vout arouez mirakloù an ampletusted sokialour, hennezh en devoa trichet. E gwirionez, ne labour ket Stakanov en e-unan evit tapout e rekordoù, sikouret e oa e kuzh get daou zen arall.

En noz ag an 30 d'an 31 a viz Eost 1935 eh oa bet tapet da Stakanov e "rekord" kentañ : 105 tonenn a c'hlaou en devoa tennet en un tammig nebeutoc'h evit c'hwec'h eurriad, da lâret eo pemzek gwezh muioc'h evit ar pezh a oa dleet. E miz Kalan-Gouiañv eh oa dalc'het er c'hKremlin, dirak Stalin, ur goñferañs kentañ get tri mil stakanovour ; e-pad 50 vlez e tas an emsav stakanovour da vout arouez an "helebini" sokialour".

Le Monde, 18 a viz Gouel-Mikael 1988.

1. helebini : meni kevezerezh etre meur a zen evit esae ober gwellañ o dever ; amañ, esae ober ar muiañ posupl a labour evit brasañ mad ar vro hag ar sokialouriezh.

